

KIS-660 – Hanc'herieg an arvestoù X – Gl. *température de couleur, balance des couleurs, équilibre chromatique*

(GE – 03 01 00)

Gl. TEMPERATURE DE COULEUR

Ar c'heal-mañ hon eus da veizañ dre ar Ventawouriezh. Diwanet eo keal ar *gwrezverk* eus ar rumm merzhadoù dec'heriet dre an termenoù *yen, tomm*, h.a. O klask reiñ d'ar gwrezverk ur furm jedoniell ez eus bet graet anezhañ ur ventenn a lavarer merkadus e kement m' en prizier, m' en merker, a-zave d' an argemmadoù devoudet gant ar wrez war vrasterioù all evel regad ur sonnenn, ec'honad ul liñvenn ; e se, dre ma 'z eus anezhañ ur c'heñver etre div vuzuliadenn, ned eo ket ar gwrezverk ur ventad ha n' en deus atalad mentawouriel ebet (sl. KIS-324, La-08, p. 276). Kavet ez eus bet koulskoude un doare da zewerzhañ ar gwrezverk, n'eo mui evel ar muzul daveel eus gweredoù ar wrez, met evel keñver etre mentadoù all ; savelet eo bet meizad ar *gwrezverk dizave* evel braster a-geñfeur gant gremm fiñvek ar molekul (sl. KIS-110, La-06, pp. 43 hh.), eleze evel ur *gremmder tolzel* pe, spisoc'h, evel *gwrezder tolzel*, a atalad $ML^2T^{-2} \cdot M^{-1} = L^2T^{-2}$ (*gremm, gwrezad* dre unanenn *tolz mol*), an unanenn o vezañ ar *joul dre gilomol* — er pleustr e reer gant an *derez Kelvin* : $1^\circ K = 12\,472 \text{ J/kmol}$. Ar *mann dizave* ($O^\circ K$), dewerzhed da $-273,16^\circ C$, a zespizer evel ar poent ma ne vez mui gremm fiñvek ebet er molekul (sl. KIS-324, id., pp. 276-277). *Skeul wreznerzhoniell* (Gl. *échelle thermodynamique*) a reer eus skeul ar gwrezverkoù dizave.

Keal an Gl. *température de couleur, Sz. colo(u)r temperature* a denn d' ar rumm merzhadoù all a-geñver gant ar gwrezverk ez eo al liv. Al liv amañ zo hini ar *c'horf du* (Gl. *corps noir*, enkae a wrezverk unvan toullet ennañ un digor bihan kenan o teurel luc'h), o kemmañ hervez an *derez gwrezverk* : pa sav hemañ ez ec'hod ar c'horf du da gentañ skinadoù ruz dreist-holl ha, bep ma kresk, e kresk ivez feur ar skinadoù glas. En dro-mañ e vez dewerzhed ar gwrezverk dre ar skeul wreznerzhoniell, eleze e derezioù Kelvin. Ar gwrezverk dizave (mentad) a dalvez enta da rummañ al livioù, a-geñver n'eo ket hepken gant ar merzhout, met gant kizidigezh al livrizhennoù luc'hwezañ. E se, ez eo kantrat komz eus **gwrezverk liv** war-bouez ul ledanviñ : evel

ma reer eus ar gwrezverk ma verv an dour ar *gwrezverk birviñ*, kurzhet e *bervverk*, e reer eus ar gwrezverk ma naou ul luc'h a livioù-mañ-livioù ar *gwrezverk liv*, a c'haller kurzhañ e **livverk**.

Gwaskaret e vez al luc'h gant ar prism en ur skalfad livioù adalek ar ruz betek ar moug (sl. KIS-357, La-09, p. 66). Un nemedenn eo al luc'hioù na gaver nemet ul liv en o skalfad, a anver dre se *luc'hioù unliv* (Gl. *lumières monochromatiques*, Sz. *monochromatic lights, one-coloured lights*). Evit pep derez gwrezverk ez ec'hod ar c'horf du ul luc'h a zo dezhañ ur skalfad livioù dibarek. Ul luc'h o vont d' an skalfad livioù, d' an *kenaoz skalfadel* (Gl. *composition spectrale*), hag al luc'h ec'hodet gant ar c'horf du d' ar gwrezverk Tca lavarer ez eo ul luc'h a *wrezverk liv Tc* pe c'hoazh ez eo Tc *gwrezverk liv* mammenn al luc'h-se.

Kengor etrevroadel al luc'hañ (Gl. *Commission internationale de l'éclairage*) en deus savelet teir mammenn dave, A, B, C, despizet evel henn : ar *stalon A* zo ul lamp edañv tungsten en atmosfer aezhel, e wrezverk liv (e livverk) o vezañ 2 850°K ; ar stalonoù B ha C zo graet gant an hevelep lamp a lakaer dirazañ siloù, anezho dileizhennoù savelet a halioù kouevr ha kobalt, o livverkoù o vezañ evit B 4 800°K, evit C 6 500°K — livverkoù nes da hini ar goulou a zegemeromp eus an heol evit B, eus an oabl glas evit C.

Gl. BALANCE DES COULEURS

An termen-mañ (Sz. *colo(u)r balance*, heñvelster Gl. *balance chromatique*) a verk dasparzh al luc'hioù a livioù disheñvel a ya d' ober ul luc'had lavaret. Arveret e vez dreist-holl a-geñver gant ar gwrezverkoù liv, pep gwrezverk liv o klotañ ouzh un dasparzh kempouez a livioù dibarek, alese arver Gl.Sz. *balance* ha Br. *mentel*. Hervez **mentel al livioù** naous d'al luc'had-mañ-luc'had e tibaber ar rizh-mañ-rizh livrizhenn. Diforc'h a reer tri rumm bras a livrizhennoù hervez ma tereont ouzh al *luc'hioù kalvezadel* (Gl. *lumières artificielles*, Sz. *artificial lights*) a rizh A, a rizh B pe ouzh al *luc'h naturel* pe *goulou an deiz* pe *heolwenn* (Gl. *lumière naturelle, lumière du jour*, Sz. *daylight*). Diouzh an dro e taskemmer mentel livioù ul luc'had diwar-bouez siloù o deus da wered leiaat ar gwrezverk liv (sil orañjez) pe e vuiaat (sil glas).

Gl. EQUILIBRE CHROMATIQUE

Nes eo ar meizad-mañ d'an hini kent nemet e sell ouzh al livioù luc'hwezet er film, da vezañ merzhet enta gant an arvesterion. Ar filmaozer ne glask ket muioc'h eget ma ra al livour eiltaoliñ dik livioù ar bed. Koulskoude e rank anaout ar c'hemm a c'hoarvez etre al livioù merzhet war an traoù hag an doare ma anadint war ar skramm.

Liv un dra, e welet hon eus, zo div barenn dezhañ, an eil piaouel d'an dra, an eil o vezañ an doare m' en goulaouer, gwrezverk liv al luc'h taolet warnañ. Un trede parenn a gemer perzh e neuz al livioù a vo bannet : kizidigezh koc'henn ar film ouzh pep liv. Ar goc'henn zo warni lies haen gimiek kizet gant pep a liv. Evel ma tamanter da gempouez al livioù el luc'h taolet war an traoù (*mentel al livioù*), ez eur degaset d' ober meiz war ur c'hempouez all etre ar c'hizidigezhioù ketep eus haenoù ar film ouzh al luc'hioù a livioù diseurt a zeu d' e gizañ. Ar c'hempouez-mañ eo a anver Gl. *équilibre chromatique*, Sz. *chromatic balance*.

Mat eo gouzout e piaou hon bevedeg un arc'hwel kevassav (Gl. *fonction compensatrice*) o tereizhañ evit ul lod bras gwered ar gwrezverk liv war hon merzhout gweladel — o tiren da skouer trec'henn domm ar goulaouiñ dre gannded. Evit dibab ul livrizhenn liv avat e ranker desellout dik mentel al livioù el luc'h ma filmer (lavarout a reer c'hoazh : *livelezh* al luc'h, Gl. *qualité chromatique* de la lumière), al livelezh oc'h argemmañ hervez an eurioù e goulou an deiz, hervez ar mammenoù el luc'h kalvezadel. Oberiañ a reer enta livrizhennoù a rizh A, a rizh B evit al luc'hioù kalvezadel, a rizh Gl. J, Sz. D, Al. T, Br. D evit goulou an deiz.

Notomp e ra galleg ha saozneg gant an tun geriadet evit lakaat kemm etre anvadoù an daou gempouez : ar galleg a geveneb *balance* hag *équilibre*, ar saozneg *colo(u)r* ha *chromatic*. Penaos dec'heriañ ar c'hemm e brezhoneg ? Ar c'hempouez kentañ zo etre al luc'hioù a livioù disheñvel (d' ul livverk lavaret), an eil etre kizidigezhioù ketep haenoù ar goc'henn ouzh al luc'hioù a livioù diseurt. Mar degemeromp *mentel al livioù* (el luc'h), e c'hellomp ober **mentel livel** (ar goc'henn) eus *mentel* kizidigezhioù ur goc'henn ouzh al luc'hioù a *livioù* diseurt — nemet e rafen a-walc'h ivez gant **mentel gromatek** dre benn ma adkaver *kromatek* en hevelep kemeradur e-barzh adanvioù a ster kemplezh na ve gounid ebet dilezel o furn etrevroadel : *ortokromatek*, *pankromatek*, *ortopankromatek*, *superpankromatek*, h.a.